



**DISPUT**  
**ETRE AR MARO**  
**HAC AN DEN YAOUANQ.**

---

AR MARO.

**C**ETE me éru, va mignon,  
 Da ober did renta réson  
 Demeus da vue tremenet;  
 Scuis eo Doue ouz da velet.

AN DEN YAOUANQ.

Autrou Doue, piou eo emân  
 A zo deut qen dizónj amàn?  
 Va speret a zo oll troublet  
 Gant eponvant eus a glêvet.

AR MARO.

Petra lavares, va mignon?  
 Lèz da spont, ha coit da réson.  
 Ha na vouies-te qet erva i  
 E teujen abred pe divezad?

AN BEN YAOUANQ.

Allas! sivoas, ne vouien qet  
 E aleac'h donet qen abret;

## 2

Me zònje dìa, pa voan dispos,  
Ne varvjen qen e vijen còs.

## AR MARO.

Mes alies e poa clévet  
Ne meus biscoas den espernet,  
Hac e tleàn an oll falc'had,  
Còs ha yaouanq eus a bep'oad.

## AN DEN YAOUANQ.

Allas! sivoas; en joa ar bed  
E voa va speret ocupet:  
Em yaouanqis voa va fianç,  
Hac em mignonet va esperanç.

## AR MARO.

Penos, den sot hac aheurtet,  
Ne voas-te qet avertisset  
Da reformi da voal vue,  
Pa ne voas qet sur a un de?

## AN DEN YAOUANQ.

Allas! me vel òu faziet;  
Mar plij ganêch', c'hoas deportet:  
Roit dîn ur blavez termen,  
Ma rin qent mervel pinijen.

## AR MARO.

Penos e fell dide ober  
Pinijen en qen bér amzer.  
Pa ne c'heus grêt bete vrémân,  
Ha te pell zo var ar bed-mân?

## AN DEN YAOUANO.

Me bromet dêc'h, a dra certen,  
 E rîo prontamant pinijen  
 Da repari va yaouangis.  
 Ma roit din termen ur mis.

## AR MARO.

Avoalc'h ec'h eus bet a amzer,  
 Ma carjes ober da zever;  
 Mes ne alles pelloc'h appell:  
 Eru an heur, ret è mervel.

## AN DEN YAOUANO.

Pe n'en dê qet ho peizonte  
 Va lezel qoit-se en bae,  
 Mar plij ganêc'h, da vianan,  
 Un devez c'hoas a c'houleannan.

## AR MARO.

Harça! bremâ paciantet:  
 Eru an heur, ret è monet;  
 Rac-se-ta, sônj es coail vué;  
 Ret è monet dirac Doue.

## AN DEN YAOUANO.

Penos eta, mervel zo ret  
 A greiz va nerz ha va yec'het!  
 Penos quittat va dessenion,  
 Va joa, va c'herent, va madou?

## AR MARO.

Diveat out bremâ da vousla,

Homàn è da heur divea:  
E zàn da rēi did an tol marvel;  
En heur-mâ e renques mervel.

### AN DEN YAOUANO

*E c'houlen sicour digant e guerent  
ha mignonet.*

O va c'herent ha mignonet,  
En han' Doue va zicouret;  
Scöet oun gantân d'ar maro:  
Deut d'am zicour, hastit afe.

### AR GUERENT HAC AR MIGNONET.

Evit bremàn ne allomp qet,  
Beza hon eus affet bresset;  
Pa retornimp, ni a velo,  
N'oc'h eus qet a fêçon maro.

### AR MARO.

Güel, den zot ha den aheurtet,  
Petra respont da vignonet!  
Anzao bremàn, den diavis,  
Peguer tromplus è yaouanqis !

### AN DEN YAOUANO.

Gûir a larit, me zo tromplet  
Gant yaouanqis ha mignonet:  
Bremàn me ro dê mil mallos;  
D'am oll maleur e zint bet caus.

## AN DEN YAOUANQ

*E c'houlen sicour digant Doue haec  
ar Verc'hez.*

Me ho suppli, ô va Jesus!  
Ha c'houi, Güerc'hez, Mam druezus,  
Me ho ped, dre ho madelez,  
D'am zicour c'hoas, me, pec'her qez.

## AN AUTROU-DOUE.

Penos ec'h eus an assuranc  
Da c'houlen ouzomp asistanç?  
Bepret out bet hon adversour;  
Petra ve demp-ni da zicour?

## AN DEN YAOUANQ

*E c'houlen sicour digant ar Zent.*

O Sent, mignonet da Zouo,  
Ho pet truez ous va enel  
Gant an oll oun abandonet;  
En han' Doue va zicouret.

## AR ZENT.

Penos ec'h eus an hardisson  
Da c'houlen hor protection?  
Ne c'heus qet miret hor gouelion,  
Nac imitet hor vertuziou.

## AN DEN YAOUANQ

*E c'houlen sicour digant e Æl-mad.*

O va Æl-mad! ô va den qer!

Va gardien en peb amzer,  
M'ho ped va sicourit brema  
Em necessite diveza.

## AN ÆL.

Qement a ellen amens grêt  
Bete vremân en da aindret;  
Poent e zeo din d'abandoni.  
Pa ne c'heus qet sentet ouzio.

## AN DEN YAOUANQ.

Me vel ervad è tremenet  
Va amzer da veza sicouret;  
Bevet e meus en libertin,  
Doue a rent justic erfin.

Em maro em diles Doue,  
Pa'm boa'n dilezet em bue;  
Resistet meus d'e oll graçou,  
Hac em refus em goulenbou.

## AN DEN YAOUANQ.

*E quittat e guerent hac e vignonet.*

Dilezet oun en abandon;  
N'en deus mui evidon pardon.  
Adieu, querent ha mignonet,  
Adieu, bed fall ha milliguet.

## AN DEN YAOUANQ

*E quittat joaüstet ar bed-mân.*  
Adieu, grandeur ha bombardeu,

Enoriou vén ha triomphou;  
 Adieu d'an traou eus an douat;  
 Adieu d'an eè, adieu d'e c'hlear.

Mallos d'ar vam, mallos d'an tad  
 A zo bet ouzin qen ingrat,  
 M'o deus grët din coll va ene,  
 D'am beza lezet em liberte.

E zàn da veza entéret  
 En ifern gant an dud daonet,  
 Da lesqi ebars er flammou,  
 Da james gant an diaoulou.

Ila possubi ve, ô va Doue,  
 E serfec'h ouzomp dôr an eè!  
 Obtenit demp, ô va Zalver?  
 Eur plac en ho cloar eternel.

## FIN

## R E C I T

*Composet a nevez var sujet eun exempl  
 éruet gant tri maleurus.*

Var ton an Uzallier.

**B**RETOUR, me ho suppli, tostait da  
 glévet  
 Eur recit eus eus exempl a neve éruet  
 Gant tri maleurus impi, cruel ha diréson,

**Enemroetd'an diaouleusa greizos'halon.**

**Er bloa mil eiz cant uguent, er guær.  
eus a Boulen,**

**Evit r̄ei sclér da entent dirac ar gristenien,  
Qement den em selaouo hac a zo badeet,  
Oc'h ober reflexion a vezoz estonet.**

**En eizvet deiz varnuguent deimeus a  
vis güenver,**

**En deveziou molarje, evit explica sclér,  
E voa an tri maleürus en eun hostaliri,  
Eus al liquriou güella ouzenem zervichi.**

**Ha pa voe leun o c'horfou, o deveus  
concluet**

**Etreze qemer mascou evit mont da redet;  
Daou ané o deus lajet var o c'heinou cre-  
c'hen,**

**Da c'holo o habijou, ha qerniel var o fen.**

**An drivet eus aneze é ar maleürussa :**

**Pa voa e gamaradet o vonet digantā,  
E sònjas mont d'ar garnel, hac en deveus  
fourret**

**E benan en eur penn maro; eūzus voa  
da velet.**

**En toullou e zaoulagad ec'h alum flam-  
boezou**

**Evit moned da redec partout dre arruyou;  
Ar vugale a zaille partout aroc deàn,**

Nemet an dud résopabl a dec'h e dirazan.

Ober a rejonto zrò hep en em rancontri,  
 Var eur c'horn demeus a guèr en em  
 gavjont o zri,  
 Hac eoo o deus galvet ar zent hac an æle,  
 Hachor Zalver biniguet da renta brezeldè.

Dre ar boez eus al langach o deveus  
 prononcez  
 A enep hor Mestr divin haç hor Mam  
 binignet,  
 E sebas un tarz curun azionc'h dë quer  
 ponner,  
 Qen a ra eur grenaden an oll ties e qer.

Spouronet eo calonou an oll habitantet  
 O sönjal e voa éra ar fin demeus ar bed ;  
 Penevert m'o deus clévet an declaration,  
 E voant prest da berissa en spont bac en  
 eston.

Distréi a ra'r maleurus da zigas d'ar  
 garnel  
 Ar peno maro voa gantàn d'e blaç, an  
 den cruel !  
 Hac e teuas d'e bedi, o trei e guein dezàn,  
 Dont an deiz varlerc'h d'e di evit coania  
 gantàn.

Ac'hane e teu d'ar guær da guemeret  
 repos,  
 Hac e za en e vele ar rest demeus an nos ;

10

Mes ne alle qet cōusqet gant an anaon  
mat,

Evoa gantān tourmantet o tonet d'e biqat.

Hep beza bet discléryet da nicun eus  
e dy

E furi, e hardisson hac e iffronteri,  
E zas gante assambles d'ar parc da la-  
bourat,

N'ell qet reposi, pa sōnj en e grim de-  
testabl.

Da nōs pa voa azeet gant e dud diouz  
an dol,  
Ec'h éru ar penn maro da darc'hat var  
an nor,  
Hac outān ar relegou dre buissanç Doue,  
Pere voa ouz en douguen entre m'oa  
en bue,

An hini a zo savet da zigueri dezān,  
Ouz er guelet och antren, a deuas da  
gouezān;  
Cregui ra an dud ennān en avis e zevel,  
Qement e voa sposronet, m'en deus  
renget mervell!

Avanç a ra an Anaon, hac en deus  
lāvaret :  
Chomit, va zud, da goania, ne genit  
den ebet ;  
Ouzit e rān va c'hombat, va c'homper  
maleurus ;

Va güelet a res brem à en eur stad perillus!

Petra e teus gonezet evit va zourmanti ?  
Elec'h pedi evidòn , e cresques va-anui :  
Goulen pardon ouz Doue eus da goal  
bec'bejou ;

Meritet ec'h eus beza dispennet a beziou.

Ar muia tra am glac'har , nonobstant  
d'am oll boan ,  
Eo ar galonad o do ha da dad ha da vam ,  
O velet o deus maguet ur buguel libertin !  
Ha güelet en difframma , ô Doue , pebes fial

Daou zevez goude ma voa an exempl  
éruet ,  
E varv e dad hac e vam , gant glac'har  
sezisset .

Cetu maro pévar den demeus ar memes ti;  
Pedomp Doue evito hac ar Verc'hez Vari.

An den-màn a voa oajet a bemp bloas  
varnuguent .

Ho pedi rân , tud yaouanq , da guemeret  
exempl

Da bellât diouz an danjer ha goal gompa-  
gnunes ,

A zo cos da vil maleur ha mil fallagries .

Pa glêoezaou gamarad peseurt punition  
En eus bet ar maleurus gondee hardisson ,  
E quittaont o moyen , ha mont er mes  
o brô ,

Evit ober pinijen ar rest eus o deiziou.

Ha c'houi, tadou ha mamou o deveus  
bugale,  
Corrijit hac instruit, ha bet soign aneze;  
Raem'ar manqit varneze, abret pe divezat  
E tint dezo o-uman ba déc'h goal galonad.

Gouleennomp digant Doué hac hor  
mam ar Verc'hez,  
Hon lod er barados goude ar fin hor buez  
Da renta meleusioù d'hor Zaiver beniguet  
Epad an eternite bars en e eürusdet.

F L N.

